

D'AN OTRO ALEXIS CAMUS

Person Trémel

PARDON ANN DREINDED, 1889

I

Gwech-all enn Perroz-Hamon

E oa eur potr bian ;

Hag hen laouen he galon,

Evel eul laouénan.

Noz ha beure e Kene

Ha ! ha !

Enn chapelig Mamm Doue :

Ave Maria !

Gwech ha gwech-all e pigne

Barz ar gador-Zarmon,

Hag eno e prezege

Vel eur person-kanton.

Diski 're d'ar vugale

Ha ! ha !

Lavaret da Vamm Doue :

Ave Maria !

O c'houde pelec'h e vane

Gant Soezig, he c'hoar vad,

Na Mamm, na tad ne groze

P'arrie diwead :

Hi nevoa disket d'ehan

Ha ! ha !

Pedi, zarmon ha kanan

Ave Maria !

Anna a groze ' wecho,
War eunn dro gant Mari :
« Pelec'h man 'r vugaleo ?.....
« Manet int da c'hoari ».....
Ha kloc'h Perroz a lere :
 Ha ! ha !
Emaint war ma zro darre.....
 Ave Maria !

Plijout a re da Vari
Gwelet enn hi chapel
Alexisik o pedi
Pa oa nemet bugel,
Ha d'ehan e lavare :
 Ah ! ha !
Te vo beleg da Doue.
 Ave Maria !

Hag a neuze peb-unan.
Tre Pempoul ha Perroz,
A wele eur potr bian
O vond beure ha noz.
— « Heman zo eur potrik c'houek
 Ha ! ha !
War he studi a veleg. »
 Ave Maria !

Goude-ze el Landreger
Pa dez da studian
E oe eur skoler zeder
En-touez ar re wellan.
O ! me mo sonj da viken
 Ah ! ha !
Deuz ma mignonik laouen !
 Ave Maria !

O nag omp bet evuruz
Enn Kloerdi Zan-Brieg !
Pa me zonz me ve joauz
Ha me a wel dourek
C'houi zo testo, mignoned :

Ha ! ha !

Ni a ouie n'omb garet.

Ave Maria !

Eno oa Job ha Michel
Ha Jakez ha Fransez
Ha Yannik, he goz viel,
Gant ann oll lévenez
Hirie emaint enn Tremel,

Ha ! ha !

Da sisik bebred fidel.

Ave Maria !

Achu a oa d'ar studi :
Alexis oa beleg.
Distrei a rez gant dudi
Da Berroz-Plaeraneg.
Hag o welet he chapel

Ha ! ha !

A ganaz vel enn bugel :

Ave Maria !

II

Ha zonz ec'h euz, mignon (pa oamp-ni gloer iaouank) *bis*.
Pa oamp-ni enn *Kan Konli*, a c'hanvemb oll Kerfank.

Zonz ec'h euz te mignon, deuz skolaj Landreger ?
Evuruz oa hon bue hag hon labour zeder.

Eno oa ann otro Frans, mignon ar skolerrien ;
Eno oa ann otro Bivik, ken barek d'hon c'helen.

Eno oa 'nn otro 'nn Angles hag ann otro Allo :
Eno Dom Job ann Alan... eunn dibab Kalono !!

Eno omp bet skolerien, eno omp bet mestro...
Amzer goz me oz karo, da viken me'z karo !!!

III

Breman out Person !... Te vo person mad :
D'amzer dremened ne vo ket gaouiad !

Ann dud zo loden enn ker Lannuon
Hel lavar ive hirie enn ho zon.

Gwerc'hez vad Perroz a pedez bian
Rei gan-id eur person evel zant Ervan.

Ha c'houi hen karo, o tud vad Tremel,
Bet fidel d'ehan, o ! bete mervel !

Hag er baradoz a kavo eunn de
Kement den a gav enn Tremel hirie !!!

LAOUENNAIG SANT ERVAN.

II